

CHOUCHENN MARC'H CHOUCHENN YAC'H !
EVAÑ CHOUCHENN = BEZAÑ = BEVAÑ !

« Pa vezan siferniet, ur volennad laezh gant ul loaiad vat a vel a-raok mont da gousket, eo ar gwellañ tra a zo da baseal ur sifern. Va medesin a lavare din un devezh, pa ho pezo poan gouzoug, emezañ, kemerit atav diouzh an noz a-raok mont da gousket, ur werennad sistr (jistr a lâromp !) pe gwin tomm, sukrit mat anezhañ gant mel, n'eus netra gwelloc'h, e-pad an dez, c'hwi a gemero tizan graet gant begoù drez ha sukret gant mel, c'hwi a evo anezhañ an tommañ ma c'hellfet, hag hep dale e vefoc'h pare ; mard eo koulskoude re stag ar boan gouzoug, e ve mat deoc'h ober ur palastr distrempet gant bleud, mel, ur melen-u, hag un tammig amann fresk. A-enep ar grip, c'hwi a gemero ur volennad-dour, a lakaio e-barzh ur werennad kognak pe rom, hag a lakaio mel d'e sukrañ, n'eus netra gwelloc'h. Ar re zo sujet d'ar jal en o daouarn e-pad ar gouañv, a ve un dra vat dezhe kemeret un tammig mel tanav gant un tammig eoul lor da frotiñ oute, hag ar re o deus faoutoù en o re, frotañ oute pep beure un tammig mel evit o frezerviñ eus ar faoutoù-se. »

Se a oa kuzulioù ar Gwenaner (Jean-Louis Henry, paotr Lennon e Kerne) e 1906. Ar mel a servij da brederiañ an dud (hag al loened kemend-all). Gwir eo e oa techet da ginnig diedoù marzhus gant ur bannac'h akool e-barzh, ha pa vefe alkool pell a vezañ ur bannac'h traoù ! Herie an dez e kaver ar mel en implij en ur bern diedoù da brederiañ c'hoazh : asambles gant tizan, pe gant laezh, pe gant dour ha sitroñs. Kavet e vez ivez en asiedoù pan vêt ouzh taol da echuiñ ar pred : gant formaj fresk pe se. Ar mel zo en touesk ar meuzioù lipous ! Pe gant kig houad poazhet hir er forn etre izel ha krenn. Tout an dud a oar e c'haller fardañ diedoù alkoolek diwar ar mel, hag an anv brudetañ eo hini ar chouchenn. Ar chouchenn pe souchenn (evel ma klever lâret dre amañ). Hemañ diwezhañ a oa anv kiez ma mamm-gozh, en Treger-Vihan ! Liv ar mel, liv ar melen eta ! Ha ken dous ha milis war ar marc'had ! Ha se oa din bezañ ar wezh kentañ klevet anv eus chouchenn ! Gwall vihan e oan d'ar c'houlz-se avat. Ha kalz diwezhatoc'h em boa komprenet petore darempred a oa etre anv ar giez hag an died ! An died hud evel ma lavar lod. Chouchenn pe souchenn, ur ger anavezet gant Tregeriz zo... a-bell zo eta. En 1895 eo roet evit ar wezh kentañ dre skrid, a-hervez : souchenn roet gant ur marc'hadour en Rosporden (Kerne adarre !) da bareañ ar grip, emezañ.

E penn all Treger-Vihan e klever ivez chufere pe chupere. Ha tout se, chouchenn pe chupere, zo dourvel e mod pe vod. Dour gant mel, gant goell da gas an died da dont primoc'h... ha suroc'h. Tud ar broioù krec'h a ev ar memes tra ivez, met dindan un anv all : Chamillard. Hag alies e vez lâret gante « un coup de châ ! ». Se am boa klevet pan oan, pell zo bremañ, o labourat en tu da Bloermael...

Chouchenn zo ur ger anavezet abaoe nebeut amzer, a-benn ar fin. Dre skrid da vihanañ. Ur ger all a oa gwezhall-gozh koulskoude : mez.

Ur ger hag a chom er verb mezviñ ! Sklaer : an dourvel a oa an died o ren en penn ar gevredigezh ha mezviñ diwarnañ a oa deuet en un doare naturel... mar gallan lâret !

Ar produiñ chouchenn en Treger a oa bet adlañset kaer gant Mark Gaultier, paotr Keroual en Ploubêr. Er bloavezhioù 60 en devoa kroget da fardañ ar chouchenn mat en deus roet brud vat dezhañ. Evel ma skrive : Chouchenn Marc'h Chouchenn Yac'h !

Herve Bihan

Levrlennadur

Jean-Louis Henry, Ar gwenan – Penoz tenna diganto o mel heb o distruja, Moullerez dre-dan Ar Bobl, Keraez, 1906.

L'union agricole et maritime, n° 136, Gwener 15 a viz du 1895, p. 3b.

Lec'hiennoù

Diwar-benn ar ger mez « dourvel » : <https://devri.bzh/dictionnaire/m/mez-2/>

Diwar-benn Mark Gaultier : <https://www.o-epicuriens.fr/chouchenn-origine/>
<https://www.brezhoneg.org/fr/auteurs/mark-jehan-emile-guillaume-gaultier-koedlezvareg>

Pennad ArMen diwar-benn ar chouchenn :
<https://www.leptitfausset.com/wp-content/uploads/2015/08/AR-MEN-Le-Chouchen-une-boisson-en-pleine-effervescence.pdf>